

B
2

Janed Ark

Pez-choeri en pevar Arvest

'Vit Merc'hed Yaouank



SANT-DREIZ

10 Rue de la Fontaine, Saint-Dreuz

1906

Hommage respectueux
+ reconnaissant
de l'auteur
J. J.

[Faint handwritten notes, possibly "Lecture Notes"]

JANED ARK

10681

X...

LB

891-

682

JOA

Janed Ark

Pez-choari en pevar Arvest


'Vit Merc'hed Yaouank



SANT-BRIEG

Ti Moulerez Sant-Gwilherm, bali Charner

1909



Roll ar O'hoarierien

JANED ARK.

IZABEL ROME, he mam,

KATERINIG, he c'hoar.

GWREG DURAND LAXART, he moereb.

HAUVIET, he mignonez ker-galon

MENJET, he eil mignonez.

HELENA,

JERTRUD, } amezegezed.

LOUIZAN, }

SANTEZ KATEL.

SANTEZ MARCHARIT.

ISABEAU DE BAVIERE, rouanez, mam Charles VII

DUKEZ BEDFORT, gwreg gouarnour ar Frans 'vit
roue Bro-Zaoz.

ITRON LA TREMOILLE.

TUD EUS AR BOBL, PLAC'H YAOUANK.

BUGALE.

BUGEL LAGNY.

JANED ARK

Pez-c'hoari en pevar Arvest 'vit

== Merc'hed Yaouank ==

ARVEST KENTAN

(*E Domremi, endro da di Jakez Ark hag Isabel Rome.*)

I DIVIZ

MENJET, HELENA, LOUIZAN (*mignonezed Janed.*)

HELENA

Bet e teus kelo eus ar Frans, Helena ?

MENJET

Ar re fallan, Helena, siouaz ! Biskoaz bro n'eo bet ken glac'haret ! Ar roue koz 'nevoa kollet e skiant-vad ; breman, e vab, chomet sklerijen e spered gantan, a welo e vro dismantret. Enebourien kounnaret o deus treuzet ar mor 'vit lakat da vestri war-nomp eun divroad. Ha mam ar roue a ya a-du gante eneb d'ar mab he deus ganet, ken e renk heman bean dindan guz en e rouantelez.

HELENA

Paour kez roue ! Paour kez Franz !

MENJET

Bemde ec'h a eur ger bennak gante ! Arru int mestr war an diou drederen eus ar vro.

LOUISAN

Ma Doue ! hon breudeur et da zifen ar roue, biken ken ne deufont d'ar ger !

MENJET

Ha ni vo paket evelte ! Gwelet e vo ar Zaozon o lac'han an dud, hag o flastran gant treid o c'hezeg an ed hon deus-ni hadet en hon farkou.

II DIVIZ

AR MEMES RE, JERTRUD

MENJET

O vont da belec'h out, mac'h out ken strafilhet ?

JERTRUD

Spontus eo gwelet an dud paour, diskabel o fenno, o c'horfo hanter-wisket, o redek du-hont, 'vel pe vent penfollet.

LOUISAN

Daoust petra zo c'hoarveet gante ?

JERTRUD

Kemer an tec'h a reont dirak an enebour hag a vo warnomp e berr-amzer nemet eun distokaden vat an nefe.

HELENA

Na piou a vo kât da zizarben anean ?

JERTRUD

An dud n'int ket 'vit ober. Ar Zaozon a lar eo ar

Frans d'e ha d'o roue bihan, Herri VI. « Egile, emeint, eo kaer d'ean bean roueig Bourges. »

LOUIZAN

O Trinded Zakr, ho pet true ouzimp ! Sant Mikel, hon faeron, hon ele mat binniget, deut d'hon diwall.

MENJET

Awejou, pa ve diskaret galloud an dud, Doue a ziskoue e hini.

HELENA

Gwir eo ec'h eo bet ar Frans karet dalc'hmat gant an Otro Doue.

MENJET

Ya. Krog e ver da laret e teuio eur plac'hig fur bennak da zovetat ar Frans a zo bet gwerzet gant eur rouanez treitour.

HELENA

Oh ! ma vije ar plac'hig fur-ze eus bro Lorrên !

MENJET

Marteze 'vo. Hon mignonez Janig a dle goût eun dra bennak. Rak n'eus ket pell e lare da Jerardin a zo aze : « Klev 'ta, komper, panevet ec'h out a galon gant enebourien ar roue, 'mije laret eun dra d'it. » Ha da bôtr Lebuin, Michel, e konte e zo etre Coussey ha Vaucouleurs eur plac'h yaouank hag a ray kuruni roue ar Frans arôk eur bla... Ne vefen ket souezet e vefe hi ar plac'h yaouank-ze, rak klevet 'm eus mam o laret e oa 'vel sodet an dud gant al levenez an de 'oe ganet Janig, ken e choment souezet, hag e c'houlennent an eil ouz egile : « Daoust petra zo digouet e Domremi, an noz-man, mac'h eo ken-seder hon c'halono, ken na bad ket hon skiant?... » A-hend-all, goût a ret pegen santel ec'h eo. Bean eo, hep gaou, skouer ar merc'hed yaouank.

HELENA

Eun êl war an douar ! Goude-kât amzer da vont d'an oferen ha da zakramanti bemde, e pak labour kement ha plac'h a dol troad war barouz Domremi.

LOUIZAN

Ha jentil neuze, ha seder ouz an holl ! Meur a wech em eus heget anei abalamour d'he fedennou : « Te, Janig, a laren, a zo eun devodez. » Hag e klas-ken ober fent ganti. Hi a re eun tam mousc'hoarz, hag a heuilhe 'vel bepred.

MENJET

Mar galljemp klevet ganti diwarben ar Frans... Gout zur a oar hirroc'h evidomp.

LOUIZAN

Meya da laret d'he c'hoar Katerinig dont aman (*Pellât a ra diouz ar re-all*). Katerinig ! Katerinig !

III DIVIZ

AR RE A OA DIAGENT, KATERINIG

KATERINIG (*klevet e ve eus a-bell o komz*)

Petra vank d'it ?

LOUIZAN

Deus aman en tammig bihan, mar gallez ! — *D'ar re-all e tont war he c'hiz* : Arrû eo.

KATERINIG

Petra zo ?

JERTRUD

Ato, Katerinig, ni 'oa o kontan diwarben da c'hoar Janig.

KATERINIG

Aboe eur pennad zo, n'eo ken ar memes hini. Gwelet e ve awejou o chom 'n he za pe war bennou he daoulin diou eur dioustu hep finval tam ebet, he daoulagad o sellet ouz tud ha na wel ket ar re-all ane ; alies e sav e-kreiz an noz da bedi ; ne zebr ken a voued, 'vit laret... Ma c'hoar, 'zo eun dra benak war he spered.

JERTRUD

N'e teus ket goulennet petra zo arri ganti ?

KATERINIG

Pa c'hoantaen digeri ar gaoz : « N'on ket, emei, 'vit laret d'it. » — « Dizammet 'teus da galon d'unan benak, emeon ? » — « D'an hini e oa mat d'in ober, em eus gret. » — (He c'hofezour oa hennez marvat !) — « Da vihanan, lar d'am zad pe d'am mam. » — « Ma, 'mei, ober 'rin, ha gavin an tu. »

JERTRUD

'C'hanta ?

KATERINIG

Tro pad eun heur 'oe bet ma zad ganti disul.

JERTRUD

Petra he devoa laret d'ean ?

KATERINIG

Eur gir benak 'meus klevet, o vean ma oan o vont hag o tond dre an ti. Koms a re eus ar Frans flastret gant ar Zaozon. Laret a re he devoa gwelet sent hag a roe urz d'ei mont da ren arme roue ar Frans. — « Ha gant ho krad vat, emei, e sentin ouz o mouez. »

LOUIZAN

O Janig kez !

JERTRUD

Hag-en 'neus ket difennet krenn he zad outi tec'hel diouz ar ger ?

KATERINIG

Eo 'vat, difennet krenn ; kaer he devoa hi laret e oa urz Doue. Eur pennadig war-lerc'h e klevis ar c'homjo-man : « *Bugelig paour !* »

MENJET

Hag aboe ?

KATERINIG

Aboe, Janig a bed muioc'h hag a ya stank ha stank d'an iliz. N'he devo ket a beuc'h ken, emei, war an douar.

MENJET

Me zo fromet o klevet anei o laret pelec'h he deus da vont.

JERTRUD

N'ez ket da zonjal marvat ec'h afe eur plac'hig diwar ar maez d'ober brezel evel ar zoudarded.

MENJET

Janig he deus doujanz Doue, ha pa laro Doue d'ei, ne chomo ket da varc'hantan. Neuze, alies 'meus klevet anei o laret e roje a greiz kulon he bue 'vit ar Frans, ma vije ret.

JERTRUD

Pedi 'zo mat ; biken 'vat ne lakin em fenn ec'h aje eur vesaerez denved da zoudard. Fentus ec'h eo ze, ken ec'h eo. Na petra ray er brezel, 'gav d'it-te ?

MENJET

Pa vo Doue a du ganti e c'hall ober traou kaer. Ne oe ket bet ar ger a Vetuli difennet gant eur plac'h, gant Judit ?

LOUIZAN

'Vel a larez, Menjet. Doue hag an dud n'eont ket dre ar memes hent. An den ne ra labour vat, nemet eur benveg mat 've gantan en e zorn ; Doue, 'vit-se, a blij d'ean ober e gaeran burzudou gant an dud an disteran... Koulskoude, pa larin ar wirione, hast am eus klevet pesort diougan a zo gant Janig.

IV DIVIZ

AR MEMES RE HAG IZABEL

IZABEL

Poent eo d'it mont gant da zenved, Katerinig.

AR RE-ALL

Ni 'zo o vont ganit, Katerinig (*mont a reont kuit*).

V DIVIZ

IZABEL

IZABEL *a glev kanaan :*

D'ac'h e kinigan ma c'halon,
O Itron-Varia a Bermon.

Arri eo Janig... gwell a ze.

Ouz ho mouez me a zento,
Betek ar maro.

IZABEL

Petra he deus c'hoant da laret... Hast am eus da c'hout ar wirione, ha koulskoude em eus aon da glevet anei.

VI DIVIZ

IZABEL, JANIG

IZABEL

O tont eus a belec'h e oas, Janig?

JANIG

Eus chapel Itron Varia Bermon-man.

IZABEL

Daoust ha gwir e ve ar pezh am eus klevet, Janig?
Laret a rer ec'h out sorc'hennet gant kwitat ar ger
evit mont n'ouzon ket pelec'h.

JANIG

Pell 'zo, mam vat, e c'haly Doue ac'hanon.

IZABEL

Ma! Da dad n'houl ken klevet koms eus ar sort
sorc'henno-ze.

JANIG

Me garfe chom dalc'hmat er ger da nean ha da
labourat ganac'h, mam ger.

IZABEL

Mat! sent ouz da vam, merc'hig, evel e teus gret
bete vreman.

JANIG

Ma mouejo, 'vit-se, a zailh ouzin da vat.

IZABEL

Tao, pa laran d'it. Ken poaniet 'teus da dad gant
da faltaziou sod, ken em eus aon e kouefe klanv.

JANIG

Ar Frans, mam garet, a zo gwasket, hag a ya da

vervel ma ne gasan ket sikour d'ei.

IZABEL

Pesort sikour c'hallez'te kas d'ar Frans, plac'hig
kez?

JANIG

Doue oar, pa c'haly ac'hanon.

IZABEL

Biskoaz, Janig, n'e toa dislaret da vam c'hoaz.

JANIG

Na biskoaz ive, mam ger, n'em eus dislaret an
Otro Doue.

IZABEL

Ma ne sentez ket dre vraz, merc'hig, e senti dre heg.
Rak dec'h da noz, da dad 'nevoa hunvreet e oas et da
heul eur strollad tud a vrezel a dremene dre aman...
« Mes kentoc'h, emean, 'vit 'na deufe ma hunvre da
wir, e veuin anei er ster Meuse, me ma-unan... »
Anveout a rez da dad : ar pezh an eus laret a ray ; hag
ouspen, e tolo e valloz warnout, siouas !

JANIG (*a stou war he daoulin dirak he mam*)

En hano Doue, mam garet, harzet na dolfe ma zad
e valloz warnon.

IZABEL

Ma ne larez ket e chomi, ne doro ket d'ean.

JANIG

Gwelloc'h eo ganin chom neuze.

IZABEL

Chom a ri, merc'hig?

JANIG

Ya, chom a rin, mam..... chom a rin,..... mar
gallan.

ISAZEL (*n'he deus ket klevet ar c'homzou dinvean*)

Mat ! breman e vo aezet ma spered, ha da dad a vo stad ennan. (*Rei a ra eur pok da Janed*). Na ouel ket, Janig. (*Mont a ra kuit*).

VII DIVIZ

JANED (*hec'h-unan*)

Petra rin-me, ma Doue !... (*Eur vouez a ve klevet o c'hervel*).

VIII DIVIZ

JANED, AR ZENT

EUR VOUEZ

Janig ! Janig !

JANED

Ar zent !

EUR VOUEZ

Merc'hig an Otro Doue, kley aman.

JANED

Santez Marc'harid ha santez Katel... Santezed biniget, ho mouez a glevan ;... tridal 'ra ma c'halon ! (*Daoulinan ra*). Deut, mar plij, da laret d'in petra d'ober. (*Santez Marc'harid ha santez Katel a arru neuze e-tal Janed hag a bok d'ei*).

SANTEZ KATEL

Bugelig paour ! setu ec'h out laket adarre etre daou zont, ha n'eo ket dleet. (*En eur goms int et da bakan da Janed*).

JANED

Mam a lar d'in chom er ger, ma zad a valloz ac'hanon ma ne ran ket. Penos ec'h in-me digante, pe 'man kont evel-se ?

AR ZANTEZED

Ha Doue a fell d'ean e ve soveteet ar Frans ganit. Pegeit e talei c'hoaz ?

JANED

N'houlfen dizenti ouz ma zud, na dizenti ouz Doue..... siouaz ! Na bras eo ma anken !

AR ZENT

Ret eo d'it mont, na pa vije kant tad ha kant mam oc'h enebi.

JANED

(*Gouelan ra*). Allaz ! Allaz !

AN ZENT

Perak klem ? Perak gouelan ? E keit e vez aze o skuilh daero difreus, e ruilh a boullado gwad ar Fransijen. (*Janed a zell ouz ar zantezed*). Ya ! ar re wellan, ar re uhelan eus da genvroiz, e ver o lac'han ane du-ze..... Kerz eta, Janig, red buhan da zikour ane.

JANED

O ! Heuzi 'ran pa welan gwad ! Fallgaloni 'rin pa vo ret d'in skuilh gwad !

AR ZENT

Ne vo ket ret d'it skuilh gwad ; n'e to 'met rei urzo, ha da zoudarded a skoio.

JANED

Penos e kasin-me, armeo, me, plac'hig dister... pe n'ouzon nag A na B na mont war vare'h, na sort ? Gret e vo gwab ouzin.

AR ZENT

Ha fors zo petra laro an dud ? Doue a bourveo pep tra d'e goulz. N'az pe ket aon. En ez paniel an avel a c'houeo ar viktor. Arabat klask digare 'bet ken. Hast buhan. N'eo ket goude, n'eo ket arc'hoaz ; hirie, dioustu, eo d'it bale.

JANED

Santezed biniget, laret d'in penôs e rin-me ma c'himiad d'am zud breman zouden ? Ma zad kounaret....

AR ZENT

Kimiad awalc'h a teus gret. Sav alese, ha bale tresek Vaucouleurs.

(*Arôk mont kwit e pokont da Janed*).

JANED

Ma ! Trugare ! Na me garje e chomfec'h ganin dalc'hmat !

AR ZENT

Pa vi nec'het, galv ac'hanomp. *Et int kwit. Janed a bok gant doujans d'an douar lec'h eo bet o zreid. Goude eman adarre war he daoulin. Skei a ra war boul he c'halon 'n eur laret :*

IX DIVIZ

JANED (*hec'h-unan*)

Ma c'halon baour ! (*Sevel 'ra 'n eun tol evel eun den gret gantan e zonj ervad*). Traou-walc'h, ha re, em eus daleet. Goude meus bet digant Doue graso dispar, ne zentfen ket outan ? Fas ar zent am eus gwelet, o mouez am eus klevet ; eur pok o deus laket war ma zal, hag em c'hreiz o deus c'houeet eun tan ha n'eo ket eus an douar. O ma Frans garet ! Ra drido da galon ! Sav da benn, ha gwel da enebour

diskaret dirak Orleans ! Na gren ken ! Na ouel ken ! Arôk ma velezenno an ed er mezio, soudarded zaos n'efont ken da douran o c'hezeg e ster al Loire.... Petra ! Ar rouantelez-man vefe distrujet ! Petra ! Kac-ran bro a zo dindan bolz an nenv, bro an enor, hag a zo eur baradoz war an douar, a vefe mac'het dindan dreid an estren ? Biken !... Laret zo d'in : « Ke d'ar Frans, merc'hig ! Gwisk da gorfig mistr gant houarn kalet, lak eun tok houarn war da ben, hag endro d'az koug tener, eur c'holier dir. Vel ma koue ar penno ed dindan falz ar vederien, e koueo diragout enebourien da vro garet »... Pa c'halv Doue ac'hanon, petra rin, nemet senti ?... Kenavo meneio, prajeier a garen, traonienno sioul, kenavo ! Biken ken Janig na bleustro ho kwenojenno !

X DIVIZ

JANED, MENJET, JERTRUD, LOUIZAN, HELENA, KATERINIG

MENJET

Distro out, Janig ? Ne wel den ac'hanout ken.

JANED

N'hallan ket chomgant an dud, pa ven galvet gant ar zent.

JERTRUD

Gwir, Janig ? Sent... eus ar Baradoz o deus da c'halvet ?

JANIG

Ya, Jertrud ; komzet o deus ouzin... Deut int diragon.

JERTRUD

Piou oa ar zent, Janig ?

JANED

Ar c'hentan a welis 'oa sant Mikel an arc'hel, hag en-dro d'ean eur bern ele. E oan o labourat el liorzig ma zad. En eun tol, da goulz an Anjelus kreiste eur sklerijen 'vel eur bann-heol a baras diragon e-mesk delio ar ween, hag e-kreiz ar sklerijen e welis eun den a vrezel ken lugernus mac'h eas ma daoulagad mezevennet.

JERTRUD

Penós e teus gouveet e oa sant Mikel?

JANED

Gantan e-unan 'meus klevet, piou e oa.

MENJET

Ha petra laras d'it?

JANED

Laret a reas d'in bean fur ha devot...; e oa eun drue vras e rouantelez ar Frans...; e oan galvet gant Doue da zovetât ma bro.

JERTRUD

Ha ne oas ket o tam-hunvreal etre kousk ha dihun?

JANED

Taol pled, Jertrud, bete goût!... Pevar bla zo 'meus gwelet anean 'wit ar wech kentan.

MENJET

Pevar bla zo! Ha n'e toa laret man d'in diwarben ze!

JANED

N'hellaris da zen ebet, nemet d'am c'hozeour, kement ha divec'hian ma c'halon.

LOUIZAN

Piou oa ar zent-all a oa deut war-lerc'h sant Mikel, Janig?

JANED

Santez Marc'harid, ha santez Katel am eus gwelet alies aboe. 'Vel diou rouanez, e tougent war o fenno bep a gurunen gaer ha lugernus.

MENJET

I o deus diskleriet o hano?

JANED

Ya, i o-unan. Eur pennad zo e teuont bemde da gomz ouzin, hag e vent tre em c'hichen, stok-ha-stok ouzin. Derc'hela reont da laret eo me a argaso ar Zaozon diwardro Orleans, hag a lako skuilh ioul zakr ar rouane war dal Charles VII e Reims.

MENJET

Petra ec'h out e sell d'ober, Janig?

JANIG

Ret mat eo d'in senti ouz Doue.

HELENA

Riotet e vi gant ar zoudarded, ha marteze end-eün n'o devo ket a respet evidout.

JANED

A betra 'mije aon, pa vo Doue o tiwal ac'hanon?

LOUISA

Gwasat kalonad 'vit da dud!

JANED

Mantret on, pa zonjan! En de-all e rois da c'hout d'am zad e pelec'h e oan laketa da vont, hag a laras d'in komjou pouner; ar re 'meus klevet gant mam aboe, a zo gwasoc'h c'hoaz. Ze na ra ket. Bolonte Doue, setu ma lezen! Arôk ma vo kuzet an heol e vin war hent Vaucouleurs.

MENJET

Biken ken, Janig kez, n'em em welfomp !

JANED

Den na oar, nemet Doue.

JERTRUD

Brasat glac'har eo hon hini !

JANED

Evidon, Jertrud, an hini eo kri ar c'himiad !

KATERINIG (*a grog en Janed*)

Nan, Janig ! Nan i ket diganimp... Mervel a rafeni

JANED

C'hoarig-vihan ! Lez ac'hanon. Ec'h afen-me da re.
d'it ar skouer fall o tizenti ouz Doue.

KATERINIG

O Janig ! Me gave d'in ez toa eun tam kalon !

MENJET (*a dap krog e brec'h Katerinig*)

Paouez, Katerinig ! Re bell ec'h ez d'ei.

JANIG

Perak derc'hel da vroudan ma c'halon d'in, paour bihan, pac'h on-me ken poaniet?... Kenavo, c'hoarig karet (*eur pok a ro d'ei*). Kenavo, ma gwellan mignonezed. *Pokan ra d'e, bep eil. Pa ari gant Menjet, e ro d'ei he c'hegel en eur laret* : Ar geiel-man, n' em bo ezom 'bet anei ken. D'it he roan, Menjet. Pan ei ganti, bez zonz eus da vignonez Janig ! (*Distrei a ra da welet eur wech c'hoaz an treo e komz ane*) Poanuis eo distagan !... Ma rin c'hoaz eur zell ouzit, ti bihan ec'h on bet ganet ennan.... Liorzig elec'h 'meus gwelet ar zent, kenavo !... Kenavo, iliz ma badeiant ; ennout em

eus pedet... ha huanadet... ha gouelet !... Kenavo, kleier biniget, levenez ma c'halon o c'hlevet ! Ho mouez drant na gano ken d'am diskouarn !... Bered zakr, eo douaret enni ma zud koz, ne welfet ken ac'hanon o taoulinan war o beio.... Ha, pa vin-me skoet gant ar maro, pell diouz kerent ha mignoned, den na deuo da bedi ganin !!! C'hoarig tener, mignonezed karantezus, gras d'imp da vean kichen ha kichen er barados !

MENJET

Bet out o laret kenavo d'az tud, Janig ?

JANED

N'hellan ket !... Ma c'halon zo frailhet ! !.....

EIL ARVEST

An eil arvest a dremen dioustu goude oa bet sakret ar roue e Reims. Tud Janed a oa diskennet en hostaleri « L'Ane Rayé » ; eno emaint.

I DIVIZ

IZABEL ROME (*mam Janed*); GWREG DURAND LAXART (*he moereb*); HAUVIET (*he mignonez ker galon*).

IZABEL

Kaerat devez evidon ! Sonjet eta em eus gwelet anei, ma merc'hig karet, e-kichen ar roue, uhelloc'h 'vit an dudjentil, hag ar brinsed... Nag e selle an dud outi ! Hag e kleven ane o laret : « Bennoz da Janed, ha bennoz d'ar vam he deus hi ganet ! »

MOEREB

Prosesion kaer dispar ! Ar roue o kerzet dindan an de, stok ha stok outan Janig, son en he zav, he baniel dispak-kaer ganti en he dorn.

IZABEL

He baniel, pa oa bet mad da vont d'ar boan, a oa mad ive da vont d'an enor. Neuze Janig a gar he baniel, dreist... daou ugent gwech muioc'h 'vit he c'hleve, emei.

HAUVIET

Hag eur bohl dud, den na oar ped, oc'h heuilh ane hag a loske youc'hadenno ken e tistone an oabl : « Gloar da Janed ! Gloar d'ar Roue ! »

IZABEL

Janig 'vit-se, a ouie kas ar gloar hag an enor d'an

Hini oa dleet... « Gloar da Zoue, emei. »... O ! Pa 'meus hi gwelet o stoui dirak ar roue neve, dioustu pa oe sakret, hag o pokan d'e dreid !...

MOEREB

N'halle den miret da skuilh daero.

HAUVIET

Piou 'nije laret, d'ar c'houlz, e vijemp hon diou o vesa hon loened, piou 'nije laret ec'h arije kement-man eun de !

IZABEL

Den avat, ma Doue !

MOEREB

Ret e oe bet d'ar grennardenig dont duman da glask eun tam peuc'h. Me, o welet pegen fur e oa, a laras dioustu d'he eontr, Durand Laxart, ma fried : Ar plac'hig-se he deus klevet eun dra bennak. Bet zur he deus graso digant Doue. Ma vijen-te, Durand, ec'h afen ganti ña Vaucouleurs. N'eo ket mat enebi ouz bolonte Doue.

IZABEL

Ne lare ket gaou ! Doue an hini a c'halve anei. Ret e oa d'imp bean dall-pik, pa ne welemp ket se.

MOEREB

Klevet 'peus, marvad, penôs e talc'he penn da Robert a Vaudricourt, gouarnour Vaucouleurs : « Ma ! mont a rin da gaout ar roue, ha pa dlejen bale diarc'hen pen-da-ben gant an hent, hag uzan ma diouhar bete penno ma daoulin, dre forz kerzet. » Ha pa lare ze, 'me Durand, e verve he daoulagad en he fenn ken na chome batet an den a vrezel o welet anei.

ISABEL

Doue oar, an dud n'ouzont ket hag a daero am eus-me skuilhet aboe,

II DIVIZ

AR. RE A OE DIAGENT HA JANED (*he daniel 'n he dorn*).

JANED (*En em daol etre divrec'h he mam*)

Mam ger !

IZABEL

Janig !

JANED

Kredi ran dont diragoc'h, ha koulskoude em eus dizentet ouzoc'h eur wech em bue. C'hoant ho poa e vijen chomet didrous ganac'h er gear. M'am mije gallet, e oan chomet !... Doue, 'vit-se, a lare d'in : « Kerz, Janig ! » Ma c'halon n'eo ket paouezet d'ho karout ; bepret e tougan ouz ma biz ar walen (*dis-koei a ra he biz, ar walen-oultan*) am oa bet diganac'h, merket warni hanoio Jezuz ha Mari.

IZABEL

O ! Ma merc'hig karet ! Pa zonjan ! Ma c'halon a vam he devoa dallet ma spered d'in !

JANED

Ha ma zad, daoust hag-en eo torret d'ean diouzin ?

IZABEL

Ya, Janig ! Da dad an eus gouelet e walc'h gant ar c'heu d'ar glac'har en nevoa gret d'it.

JANED (*pokan ra d'he moereb*)

Biken, moereb, n'ankoaïn pegen mat oc'h bet d'in. Pe lare an dud e oan diskiantet, c'houi a zifenne ac'hanon. Pa vijen digalonekaet, e larec'h d'in e teuje an treo da vean a du ganin ma oa bolonte Doue. C'houi a oa 'vel eur vouez all hag a responce da hini ar zënt. Aliet ganac'h ma eontr Laxart a

gasas ac'hanon da Vaucouleurs, hag a brenas d'in eur marc'h da vont da gaout ar Roue. Setu penos hoc'h eus ho lod er gouel hirie. — *Da Hauviet en eur bokañ d'ei* : Hauviet ! Ma mignonez ker-galon ! Ne 'moa ket diskuilhet d'it ma sekret, rak, ha bean oa bet fiet ennon, bepret n'eo ket d'in e oa ; da Zoue 'n hini oa ; ha d'ar roue... Et e oan kwit hep gwelet ac'hanout, gant aon e vije rannet hon c'halon gant ar glac'har... — Hast am moa da bokañ d'it, ha da gontan d'it ma doare, aboe mac'h on deut eus ar ger (*Hauviet na gred ket zellet outi*)... Perak ne zavez ket da zaoulagad ?

HAUVIET

Kad a ra d'in ec'h on oc'h hunvreal ! Ken uhel ec'h out savet, Janig, ken em eus poan o kredi e vez ar vignonez a gare ac'hanon.

(*JANIG a bok da Hauviet adarre*)

Hauviet ! Da vignonez on bepret, marvat ! Daoust ha chenchet e ve ma c'halon ! — *D'he mam* : Oh ! Komzet d'in, mar plij, eus ar vro. Penôs ema kont er ger ? Yac'h eo an dud ? N'eus man a neve ?

IZABEL

Netra neve, Janig, nemet e kavan iskiñ na vez ken en hon c'hichen. Da dad ha me a ve dalc'hmada komz diwar da ben. Nag a dreo, Janig, a teus kaset da ben en eur ober pevar miz !

JANIG

Pell diouzoc'h ar pevar miz-ze a zo bet hir d'am c'halon, evel pevar bla... N'hallin biken trugarekat awalc'h Doue an eus teurveet ober treo bras gant eur baourez kez evel don !

MOEREB

N'haljes ket, Janig, kontan ane d'imp berr ha berr ?

JANED

Eun tam peuc'h 'meus breman : « Pa 'moa kuitaet ma eontr e Vaucouleurs, e pignis war ar marc'h 'moa bet digantan, hag ec'h is gant c'houec'h soudard kalonek 'trezek Chinon da gaout ar roue. Ne oa ket ebad : enebourien eleiz ar vro, tan ha gwad dre-oll ; n'hallemp ket heuilh an hencho bras ; ret e vije d'imp mont adreuz d'ar meneio ha d'ar c'hoajo ; pa zonzemp nebeutan, e renkemp treuzi eur waz-dour pe eur ster vras, hag an dour na ve ket tom er miz c'houevrer. Meur a wech eo bet darbet d'imp bean paket gant an enebour, Me, pa welen ma bandennig o krenan, a lare : « War rok, mignoned ! » Hag e talc'hemp da vont.

HAUVIET

Gwir eo, Janig, 'nevoa laket ar roue eun all en e blas, ha troket gantan e zilhad roue ?

JANED

Ya, hag hen a oa et 'mesk ar re-all. Sonjal a re gantan tromplan ac'hanon. Bepret ec'h is war-eün d'ean en eur laret : « Mabig ar roue. » — « N'eo ket me, emean » — « Geo, c'houi eo ar roue, ha ganac'h em eus da gomz. Me eo Janig ; arri on en hano Doue da zikour ac'hanoc'h d'ober brezel d'ar Zaozon, da zewel ar zich diwar Orleans, ha da gas ac'hanoc'h da Reims, ma vo skuilhet an ioul zakr war ho tal. Roet d'in armo ha soudarded, mar plij.

MOEREB

Laket 'foa stad ennän, marvat, Janig ?

JANED

Mousc'hoarzin a re, o klevet ac'hanon ; mes 'nevoa ket a fizianz, a gred d'in. Lakat a reas kerc'het kanterkant doktor bras da amprou hag-en e oan a-beurz Doue ; ha setu me, mesaerez dizesk ma oan, azeet war

bennig eur skabel dirake, ha ret mat d'in respont e-pad ter zun d'an hanter-kant doktor-ze a glasse luian ac'hanon, ha lakat ac'hanon d'en em droc'han dre ma c'hoimjo. Sklerijen 'mije digant ma zent, hag e teuas ma zol da vad.

MOEREB

Neuze oe roet soudarded d'it ?

JANIG

Chom a reas en disfi diouzin ken n'am moe diskoeet d'ean e ouien, a-beurz Doue, eur sonj kuzet mat en e galon ha n'en devoa laret anean da zen ebet. Neuze vat e lakas ac'hanon e pen an arme.

HAUVIET

Digant ar roue 'teus bet da armo Janig ?

JANED

Ya, nemet ma c'hleve. Roet oa bet d'in unan, ar c'haeran — « N'am bo ket hennez, a laris. Digaset d'in an hini a zo kuzet dindan an douar en iliz santez Katel a Fierboa e-kichen an ôter ». — Toullet e oe, hag e oe kâd ar c'hleve, deut eno, den na oar na pegoulz na penôs... Gant ar c'hleve-ze en eun dorn, ha ma baniel en dorn-all, em eus skarzet ar Zaozon diwar dro Orleans.

IZABEL

Pebez levenez evidout, pa drec'hes war an enebour !

JANED

An eur 'meus d'ho kwelet hirie, mam garet, a ra muioc'h a vad d'in evit ar c'haeran viktor.

IZABEL

Sonj az tije ouzimp a-wejo ?

JANED

Petra laret, mam vat ? N'eus forz pelec'h e ven, n'ankoaan ket ac'hanoc'h. O ! Mar galfen mont

ganac'h, e vije barr ma c'halon gant an evurusded. Siouaz !! Ar roue a c'hourc'hemenn d'in chom c'hoaz da ren an arme, hag e sentin, ma otreet ac'hanon.

IZABEL

Merc'hig a garan ! N'enehin ket ac'hanout. 'Vel a ri, e kavin mad !

JANED (*a bok d'he mam*)

Trugare, mam dener ; mes penegwir ne welin ken tud vad Domremi, ee'h an da rei d'ac'h, da vihanan, eur c'helo mat da gas d'e. Goulennet em eus digant ar roue ma vije ar barouz 'lec'h ec'h on bet ganet, diskarg a wiriou ; ha laret en neus ya a galon vat. Kaset d'e, me ho ped, ar c'helo-ze eus ma feurz.

(*Klevet e ve trouz er-maez*) Gloar da Janed ! (*Ar re-all a zell ouz Janed*).

JANED

Aboe Orléans ema kont evel-se.

HAUVIET

Prennet 'vo an nor oute, Janig ?

JANED

Nan, Hauviet, ne vo ket. N'oulfen ket poanian ar vugaligo-ze.

III DIVIZ

AR MEMES RE, EUR RUM BUGALE A

(An tri rum bugale A, B, C a deuo aman warlerc'h, a zoug en ho c'herc'hen medalenou, varne skeuden Janed Ark.)

BUGALE A

Hon mammo o deus kaset ac'hanomp da laret trugare d'ac'h, Janed.

JANED

A betra o deus da drugarekat ac'hanon, bugale ?

BUGALE A

C'houi ho peus hon difennet ouz ar Zaozon, Janed.

JANED

An otro Doue, ma bugale, an hini neus bet true ouz ar Frans, o vean ma oa bet pedet gant sant Charlez-Veur ha zant Loeiz.

IV DIVIZ

AR RE A OA DIAGENT HA RUM BUGALE B

BUGALE B (*peb a chapelet en o dorn*)

Janed, laket ho torn war hon chapeledo, mar plij.

JANED

Laket ho torn-c'houi warne, bugale, hag e vo memes tra.

BUGALE A B

Ni n'omp ket sent, Janed.

JANED

Ha me, bugale, n'on nemet eur bec'herez baour.

V DIVIZ

AR RE A OA DIAGENT HA BUGALE C

BUGALE C (*a ya d'en em dol var benno o daoulin*).

BUGALE A B (*a ra evette*)

Ho pennoz, mar plij, Janed !

JANED

Ma bennoz, bugale, n'eo man ebet, bennoz ho tud avat, ne laran ket.

BUGALE C

Hon zud an hini o deus kaset ac'hanomp da c'houlenn ho pennoz evidomp hag evite. O Janed, c'houi hag a zo mad, ho pennoz, mar plij !

BUGALE A B

Ho pennoz, mar plij !

JANED

Me n'em eus galloud ebet da vinnigan ac'hanoc'h... Et da gaout ho peleien o deus ar galloud-ze dre o c'harg.

BUGALE C

Hon beleien o deus laret d'impive dont da c'houlenn he bennos digant Janed.

JANED

Ar zent a gar ar vugaligo ive ; pedet ar re zo war ho medalenno.

BUGALE A B C (*o tiskoei prim o medalenno*)
C'houi, Janed, zo warne. Ho pennoz, mar plij !

HAUVIET (*o vean sellet ouz ar medalenno*)
Ho portred eo, Janig !

JANED (*poaniet*)

Petra o deus gret c'hoaz !

BUGALE A B C

Ho pennoz, mar plij.

IZABEL

Alo, Janig, kouls eo d'it rei da vennoz d'ar vugaligo-man.

JANED

Doue d'ho pinnigo, bugaligo, hag ho tud evel doc'h !

BUGALE A B C

Trugare Janed ! (*'n eur vont er-maez e pokont da vaniel Janed*). Gloar da Janed !

VI DIVIZ

AR RE A OA AROK, EUR PLAC'H YAOUANK

ganti eur bugel bihan maro hep e vadeiant (bugel Lagny). Ar vugale A B C ne oant ket et mad er-maez, ma teuont war o c'hiz gant ar plac'h yaouank.

AR PLAC'H YAOUANK' (*'n eur ouelan*)

Janed, sed aman eur bugel maro hep e vadeiant. Mar galje dont beo, paneviye 'met 'vit bean badeet !

JANED

Paourkez bugelig !

AR PLAC'H YAOUANK

Bet true outan Janed ! Bet true ouz e vam a varvo gant ar glac'har, ma 'n eve ket bet he bugel e vadeiant. Hi he deus laret : « Kaset-an da Janed ! »

JANED

Gwasat ma 'z eo d'eur bugel mervel hep e vadeiant, pa n'hal ket mont er baradoz... Ma Doue ! n'anvean ket hencho kuzet ho Providans ; fianz am eus koulskoude en ho madelez, hag e kredan goulenn diganac'h m'an nevo ar bugelig-man gras presius ar vadeiant... Pedomp oll (*Holle stouont war o daoulin nemel Janed hag ar plac'h yaouank. Janed a lar : « Hon Tad pehini zo en nenv ; ar re-all a respont. » A greiz oll, ar plac'h yaouank a wel ar bugel o finval.*)

AR PLAC'H YAOUANK

Beo eo ! Beo eo !

AN HOLL

Beo eo ! Beo eo ! Gloar da Janed !

JANED (*hag an holl war he lerc'h*)

Gloar da Zoue ! Gloar d'ar Werc'hez !... Kaset ar bugel d'an iliz da vadei.

AR PLAC'H YAOUANK (*da Izabel*)

Bezeta, mar plij, maeronez d'ar bugel-man ema ho merc'h zantel o paouez addigas e vue d'ean (*Holl ec'h eont d'an iliz nemet Janed hag Hauviet. Kerkent ec'h ari tud eus ar bobl.*)

VII DIVIZ

JANED, HAUVIET, TUD DISTER

TUD DISTER

Ha gwir e ve, Janed, ec'h afec'h d'ar ger gant ho tud ? Mar dilezet ac'hanomp, neuze ec'h omp kollet adarre, siouaz !

JANED

Nan, tud vad, ma dever zo chom c'hoaz e pen an arme ; nan in ket d'ar ger diganac'h.

TUD DISTER

Doue da vean meulet ! Trugare d'an hini a ra d'imp eur vad ken bras ! Bennoz d'ac'h ha d'ho paniel binniget ! (*Poka a reont d'ar baniel hag ec'h eont er-maez.*)

VIII DIVIZ

JANED, HAUVIET

HAUVIET

Pegen karet out, Janig !

JANED

Ar bobl a zo mad, hag a gar ac'hanon, Hauviet ; mes bean zo en-dro d'ar roue tud ha ne glaskont vad ebet d'in. Ar gwasan eo La Tremoille, denjentil pinvik bras, hag a ya e arc'hant da goll neb na blij ket d'ean... Aon am eus da vean gwerzet !

HAUVIET

E vije kat eun treitour, a gav d'it ?

JANED

N'ouzon na pelec'h, na pegouls, mes ma mouezio o deus laret d'in e vin gwerzet ha traiset arôk gouel Yan da vla (*gouelan ra*). Ped evidon, Hauviet !

HAUVIET

Goude e ouies ze, e chomi aman c'hoaz ?

JANED

Me zo ganet evit-se ; bolonte Doue eo.

IX DIVIZ

JANED, HAUVIET, ITRON LA TRÉMOILLE

ITRON LA TRÉMOILLE

Perak lakat kement-se a vesk etouez an dud, o rei da gredi e ret c'houi bep sort burzudo kaer ? Emaint o vont dre ar ruio 'n eur grial a bouez penn : « Gloar, enor, trugare da Janed ! » En o dorn baniel Janed, en o c'herc'hen medalenno, he fortret warne. Dreist an dujentil hag ar brinsed end-eün e ve savet ar plac'hig-ze diwar ar maez ! .. C'houi ho peus gwisket aze eur vantel gwall-ampl diouz ho tiskoa. An enorioze n'int ket 'vit sort d'ac'h-c'houi... Breman lezan ac'hanoc'h en ho roll. Gret evel a garfet (*Mont a ra kwit*),

X DIVIZ

JANED, HAUVIET

HAUVIET

Piou eo an itron divergont-se ?

JANED

Honnez eo itron la Trémoille, Hauviet.

HAUVIET (*Pokan ra da Janed*).

Paour kez Janig !



TRIVED ARVEST

Janed er prizon e kear Rouen

I DIVIZ

JANED

JANED

Eur bla zo ec'h on koueet etre daouarn ma enebou-rien ! Aboe o deus kaset ac'hanon eus an eil prizon d'egile, chadennet ma daouarn, chadennet ma zreid, ken ec'h on bet tolet gante en toul hudur-man 'vel ar brasan torfetour. Bourevien garo a ve o c'hedal ac'hanon noz-de evel bleizi ; hag ar re a dleje dont d'am sikour, ar roue e-unan, na vije ket bet roue panevedon, a zo o klask o flijadur, pa on-me en anken ar maro... (*Sevel a ra en he zav gant kalz a boan*). Ma Doue ! Brevet eo ma c'horf ! Ma diouhar n'int ken 'vit souten ac'hanon... (*Azean ra*). Ma c'haljen kât eun tam diskwiz, da vihanan !... O Domremi !... O, amzer evurus ma oan bugel er ger !... Mam dener ! Mar gouifec'h e pelec'h on !... Siouaz ! Ma c'hlemmo n'eont ket pelloc'h 'vit ar mogerio-man Den na glev ac'hanon, den na zonzj ennon !... Ec'h an da vervel, dilezet gant an holl ! (*Klevet e ve gwigour pouner an dorojo*). O gwasat trouz a glevan ! Ar maro ! Ari eo ar boureo !...

II DIVIZ

JANED, ISABEAU (*ar rouanez treitour.*)

ISABEAU

Nan, Janed, n'on ket ar boureo, mes unan hag a gar ac'hanoc'h.

JANED (*d'ei hec'h-unan.*)

Aon am eus. Ar Zaozon a zo treitour.

ISABEAU

Klevet em eus ho toare, Janed, hag em eus bet true ouzoe'h.

JANED

Me, n'eo ket brao kât true ouzin, itron ! Unan eus ma barnerien a zo bet tolet er prizon abalamour ec'h anzave e oar kri ouzin. Eun all eo bet darbet d'ean bean beuet er ster Sen, evit bean laret d'in divall ouz ar pechou stignet diragon. Eur wreg a zo bet dewet en beo, dre ne gave ket ac'hanon eur plac'h fall... Nan, n'eo ket brao kât true ouzin. Aon am eus n'arribe eun droug bennak ganac'h.

ISABEAU

Doue, merc'hig, 'neus digaset ac'hanon aman. Bet ho peus kelo eus ho tud neve-zo, Janed ?

JANED

Kelo eus ma zud ma deuont ket aman.

ISABEAU

Gwall-c'hlac'haret int.

JANED

Ya !

ISABEAU

Mar galfent gwelet ac'hanoc'h, e vije astennet o bue d'e.

JANED

O ma Doue ! (*Diskouei a ra eo chadennet he xreid hag he daouarn.*) Gwelet a ret Itron.

ISABEAU

Gallet e vije, marteze...

JANED

Poan am eus o kredi e c'halfec'h...

ISABEAU

Eo, eo. Gout a ret ec'h on deut aman aezet mat. Daoust pegen pouner int, dorojo ar prizon n'o deus ket harzet ouzin da zont, rak se...

JANED

E vije torret ma chadenno ?

ISABEAU

Ya ! ha digoret an nor d'ac'h da vont er-maez ac'han.

JANED

Hag e c'halljen mont da Domremi ?

ISABEAU

Hag e welfec'h ho tad paour, ho mam vad, ho tud, ho mignonezed.

JANED

Ha penos tec'hel ac'han ? Laret d'in, mar plij, en hano Doue !

ISABEAU

Ho komjo fraez ha didroidel a zigoro an nor d'ac'h 'vel eun alc'houe da vont er-maez... Pesort sekret a vec'hie kalon ar roue, Janed ? Ha penôs ho poa gallet dizamma anean ? Laret d'in ?

JANED

Difennet mat eo d'in laret.

ISABEAU (*depitet*)

Ah !... 'C'hanta ! laret d'in penôs ho poa gret evit bean digemeret mat gant ar roue.

JANED

Eur merk oa bet roet d'ar roue da ziskouei e oan-me a-beurz Doue.

ISABEAU

Pesort merk oa hennez ?

JANED

N'hellan ket laret.

ISABEAU (*divarc'het, en dro-man*)

N'hallet ket laret, c'hoaz ?... Ne larfet ket ive pegeit pado ar merk-ze ?

JANED

Marteze e pado mil vla, marteze muioc'h c'hoaz : den na oar.

ISABEAU

Daoust hag-en 've ar merk-se, danve arc'hant, aour, mein presius, oc'h ober anean ?... Nemet eur gurunen gaer bennak e vefe ?

JANED

Ya, eur gurunen eo, ha kaeran hini 'zo er bed.

ISABEAU

Petra verke ar gurunen-ze ?

JANED

E tistrofe d'ar roue adarre rouantelez ar Frans en he fez. Eun el 'nevoa digaset ar gurunen hag a laras d'ar roue e vije diboaniet ar Frans dre ma labour, ma karje stourm asambles ganin.

ISABEAU

Marvat n'et ket da chom a du gant an den digas-ze. Hennez a zo o klask e blijadur ; n'eman ket e ben ganac'h. Laret e trofet kein d'ean, 'vel an eus gret d'ac'h, hag ho chadenno...

JANED

Ma gir 'meus roet d'ar roue ha d'ar Frans. Ar

Fransijen, itron, na dorront ket o gir. Bevet ar Roue ! Bevet ar Frans !

ISABEAU

Me zo eus ar Frans ive, Janed.

JANED

Ar boan a gemeret evit va zouellan ha va lakat da derri ma gir a ra d'in bean en douetans eus a belec'h oc'h.

ISABEAU

Pa laran d'ac'h on eus ar Frans, ha n'hall prinsez ebet eus ar Frans bar bat warnon !

JANED, (*o souzan*)

O Doue ! Daoust ha c'houi 've Isabeau, ar rouanez ?

ISABEAU

Laret mat ho peus. Me eo ar rouanez Isabeau mam ar roue Charles VII ho peus laket kuruni en Reims.

JANED

Ar vam hep kalon ! Ar rouanez treitour ! Bosen ar Frans !

ISABEAU

Daoust da ze ! Ma 'meus true ouzoc'h.

JANED

Miret ho true evidoc'h hoc'h-unan, rouanez ! Truezusoc'h eo ho stad evit ma hini.

ISABEAU

Me a wel an tan o tevi ho korfig paour emberr, ha na zonjet ket ze !

JANED

Me varvo divlam ha direbech, ar peuc'h em c'hon-sians, fidel d'am Doue ha d'am bro... O rouanez ! En hano Doue ! gret eur zell war ho pro, ken kaer gwechal ! Dismantret hirie gant ho torn dinatur !

ISABEAU

Hola! plac'h vihan, gwal-bell ec'h et ganti!...
Gwelet a ran n'eus man d'ober ganac'h.

(*Mont a ra kuit. Kerkent ec'h arri an dukez Bedford.*)

III DIVIZ

Dukez BEDFORT, JANED

AN DUKEZ

N'out ket en em zonjet ervat c'hoaz, Janed?...
Neuze 'ta ar vad a reomp d'it na dal man?

JANED

Ar vad-se, gwelloc'h eo ar maro evitan.

AN DUKEZ

Te dleje mervel kant kwech elec'h unan.

JANED

Pesort torfejo am eus gret-me biskoaz?

AN DUKEZ

Kement torfed a zo ac'h eus gret... N'ec'h eus ket
gret brezel d'ar Zaozon, sorserez 'zo ac'hanout?

JANED

Mar don sorserez, set' aman komjo ma *Agrippa* :
« Doue da gentan! Bevet ar Frans! Ar Zaozon er-
maez! »

AN DUKEZ

Tevel a ri da c'heno, tra villiget!

JANED

Ma trec'ho ar Frans war ar Zaoz!

AN DUKEZ

C'hoaz e sonjez trec'hi warnomp; ha te chadennet
da zaouarn ha da dreid?

JANED

Keit ha ma chommo eun elfen bue em c'hreiz, me
laro : « Bevet ar Frans! Bec'h d'ar Zaozon! »

AN DUKEZ

Diskiantet out!... Arôk an noz, ne vo netra
ac'hanout.

JANED

Me oar e karje ar Zaozon gwelet ac'hanon maro.
Ma! me 'bilo ane c'hoaz ha me maro .. Klevet, ha
taolet pled mat d'ar pezh a larin d'ac'h, dukez a
Bedfort. Biken, nan, birviken, ar Frans d'ar Zaozon
na blego! Holl e voint boutet er-maez. Ne chommo
ket unan, unan hepken... hag a renkfe ar Frans oll
dont da vean eur vered d'o lonkan.

AN DUKEZ

Gant piou 'teus klevet se?

JANED

Gant ma moejo em eus klevet.

AN DUKEZ

Neuze 'ta te dalc'h da laret e teus klevet moejo?

JANED

Laret n'em eus ket, a ve laret gevier... Ha c'hoaz
e klevan ane... Aze 'maint .. Breman emaint o
kozeal ouzin.

AN DUKEZ (*a zo divarc'het war an tol, mes he c'hasoni
a drec'h prim war an aon he deus*)

Paour kez plac'h sorc'hennet!... Yaouankik out
c'hoaz, ma flac'h!... Mervel da naontek vla a zo
garo!... Pell diouz da gerent, diouz da vro... Netra
spontusoc'h!... N'eus ket da laret eno, ret eo d'in
sovetat da vue d'it. (*Tapout a ra eur bluen hag eur
skrid*). Setu aze eur pennad skrid. Lak da zin war-
nean 'vit tec'het rak ar maro.

JANED (*a grog er bluen 'n eur grenan*)

Ma zent'viniget! Roet sklerijen d'in. — *D'an dukez*:
Petra 'zo skrivet war hennez?

AN DUKEZ

Sin bepred... N'eus ket amzer da goll... Sin, da
harz ar maro...

JANED

Petra 'zo war ar paper-ze?

AN DUKEZ

Set' aman : « Ansav a ran ne oa nemet gevier ma
mouejo ; ansav a ran em eus c'hoariet dre sorserez ;
aliet gant Satan, em eus kredet me, ha roet da gredi
d'ar re-all treo enep d'an Iliz katolik. »

JANED (*a dol he fluen*)

Ho pennad-skrid 'zo gevier pen-da-ben. Biken ma
zin na lakin warnean. Dale'hmat ec'h on-me bet
kristenez vat, ha dalc'hmat e vin.

AN DUKEZ

Aheurtet out ! Ne zini ket ?...

JANED

Nan, biken ne zinin an treo euzus-se.

AN DUKEZ

Ma ! Gwaz a ze d'it ! Dindan eun heur aman te zo
barnet evit mat.

JANED

Ac'hanta ya, ya ! Ma teuio ar maro da diverât ma
merzerenti ! A bep ma tosta d'in an termen diwezan,
me gar mui-ouz-mui kement tra oll a lake ma c'halon
da dridal. Gwelet a ran o skedi a-us d'am pen ar
gurunen a lak Jezuz war ben e verzerien... Kaer em
eus kaloni ha harz, ar sonj da vervel en tan a spont
ac'hanon.

IV DIVIZ

JANED, AR ZENT

(*N eur arruout e pokont d'ei*)

JANED

O zent viniget ! Gwasket on gant ma bec'h !

AR ZENT

Petra, Jannig, n'ouzout ket eo dre ar poanio e
c'honeer ar gurunen ?

SANTEZ MARC'HARID

Me a oa bet freget ha dispennet ma c'horf gant
krigi houarn, ha devet gant ar flammo tan... Bez
kalonek, bugelig ! (*Ar zent a bok da Janed*). Ni a vo
'n ez kichen, ni zikouro ac'hanout.

V DIVIZ

JANED (*hec'h-unan*)

JANED

Pegen buan int et arôk ! -- *Janed he divrec'h kroazet
ganti war e c'halon. Eur pennadig goude, e sav en
eur laret* : Rei a ran ma bue da Zoue evit ar Frans !...
Kenavo kement a garen ! Kenavo d'ar baradoz !

PEVARE ARVEST

*Ar beared arvest a dremen e Domremi e ti tud Janed,
goude e oa bet devet ar xantez*

I DIVIZ

MIGNONEZED JANED

MENJET

Hag ec'h eo maro Janig?

HAUVIET

'Vel e varve ar verzerien. An torfed digar a zo bet gret war greiz leur-ger ar C'hoz-Varc'had e Rouen.

Pa welas ar bobl tud a oa eno, hag ar bern keun-neud grac'hellet evit devi anei, e loskas eur griaden : « Rouen! Rouen! aman eta e varvin-me! » Paour kez Janig! Ne oa ket evit miret da skuilh daero. Gervel d'he zikour a reas ar Werc'hez hag he zantezed. Goulen a reas eur beden digant kement-hini oa eno, hag eun oferen digant pep beleg... An holl a oa mantret, ar vourevien, o-unan, a shuilhe daero!.. 'N eur bignal war ar chafod, e c'houlennas eur c'hрусifi; eur zoudard a ra unan dioustu d'ei gant daou dam koad ha setu hi o stardan anei war boull he c'halon. Ar groaz prosesion a oe kerc'het dious an iliz. Eur beleg a urz sant Fransez a stignas anei aben d'ar verzerez. A boan ma oa kroget an tan er c'heunneud, ma savas eur vogeden du ha tenval tro-war-dro da Janig. Mes kerkent, an avel grenv argasas ar moged. Neuze oe gwelet Janig, amaret he daouarn, hag o pedi, troet he daoulagad 'trezek an nenv. Ha ter gwech e klemmas evel-hen :

« JEZUZ! JEZUZ! JEZUZ!... » Neuze e soublas he fenn evel he Zalver war ar c'halvar, hag e tremenas!!! Hag e oe gwelet, dindan skeud eur goulmig wen, he ine o nijal da gād an Nenv.

An holl a veule ar verc'hig divlam ha pur, ar vrezelerez didrec'het, hag a grede stard penôs dorn Doue a skoje he bourevien.

JERTRUD

Eur batronez neve a zo et d'imp d'ar Baradoz d'hon difen war an douar!

II DIVIZ

AR RE OA DIAGENT, IZABEL, MOEREB JANED

HAUVIET

Bezet didor d'ho klac'har, mam rannet ho kalon! Ho merc'h zo er Baradoz!

IZABEL

Hen goût a ran, ha skler eo d'in penôs Doue zo bet just eviti, rak Doue na ve na gwerzet na prenet e justis... Enor ma merc'h, evit-se, a zo bet mastaret dirak an dud gant barnerien disleal. Biken ne dizec'ho ma daoulagad, ha biken ne divantro ma c'halon, ken na vo hadzavet'hec'h enor d'ei. Ret eo ma vo diskleriet didammal gant an holl. Janed a c'houle bean barnet gant ar Pab; mont a rin-me da gāt anean, kousto da gousto.

Ar justis a zo dleet d'am merc'h didammal, d'he mam, mantret gant ar glac'har, d'ar Frans hadzavet ganti, d'an lliz, stlapet fank outi gant barnerien digonsianz (*Mont a ra war benno he daoulin, ar re-all a ra evelli*).

O ma Doue! Bet true ouz eur paourkez mam, ouz ho Frans holl-garet, ouz hoc'h Iliz zantel!

Janed er Baradoz

E palez kaer ar Baradoz,
 'Touez ar merzerezed evrus,
 A zo eur werc'hez gloriüs
 Kuruñet gant lili ha roz.

Janed Ark, merc'hig ar Lorren,
 'N he dorn he banniel frank-digor,
 Dec'h er boan, hirie en enor,
 A lugern 'vel eur stereden.

War he drôn Roue an Nenvou
 'N eur he diskoei a lar d'ar Frans :
 « Pedet hag ho pet esperans,
 Klevet em eus hoc'h hirvoudou ;

An hini a lammas ho pro
 Gwechall eus skilfou ar Zaozon
 He deus goneet ma C'halon :
 Evel biskoaz Jann he zalvo. »

DISKAN

*O Gwerc'hez santel Donremi,
 Deut eta, oh ! deut hep dale,
 Ha dre nerz ho merzerenti,
 Salvet Frans hag he bugale !*

